

KIS-609 – Sz. typhoid, paratyphoid

(GE da YVT – 03 12 98)

Evel a welez dre al luc'heiladoù tennet eus an *Elsevier's Medical Dictionary*¹ a lakaan kevret en deus ar *paratyphoid*, koulz hag an *typhoid fever*, anvadoù niverus hervez ar yezhoù. Da'm meno, ar gwellañ dimp eo amprestañ ar boutinañ hag eeunañ anezho, eleze *paratifoid* g. ; ober ivez gant *tifoid* g., *terzhienn difoid* (*tifoid* da arverañ ken evel pennanv ken

evel adanv — dindan levezon ar yezhoù latin ez eur techet da lakaat harzoù krenn etre ar rummoù gramadegel ; kalz berusoc'h eo ar re-mañ er yezhoù keltiek ; an adanv *tifoidel* a ve da arverañ gant ar ster "a-zivout an tifoid" : *anaezioù tifoidel* "anaezioù a renker dindan ar skritell tifoid"). Un diskoulm all a ve ober gant *tifuz*, evel en alamaneg, nemet e rankfed spisaat evel ma ra dre ur rakger pe un adanv war-benn diforc'hiñ diouzh an *tifuz* ent strizh, pezh a ve luziañ hep ezhomm.

¹ Sliosberg, *Elsevier's Medical Dictionary*, Amsterdam/London/New York, 1964.

ENGLISH / AMERICAN	FRANÇAIS	ITALIANO	ESPAÑOL	DEUTSCH
typhoid fever; dothienenteria; dothienenteritis; typhoid; abdominal typhus; enteric fever; cesspool fever; lent fever; night soil fever; pythogenic fever	affections typhoïdes; typhoïde; fièvre typhoïde; fièvre entérique; dothiésentérie; typhus abdominal	tifo addominale; tifoide; febbre tifoide; ileotifo	fiebre tifoidea; ileotifus; tifoide; tifus abdominal; dotienenteria; dotienenteritis	Typhus abdominalis; Bauchtyphus; Unterleibstyphus; Abdominaltyphus; Darmtyphus
Brion-Kayser disease; Schottmüller's disease; paratyphoid	paratyphoïde	paratifoide	paratifoidea	Paratyphus; Schottmüllersche Krankheit

(GE da YVT – 23 12 98)

Goulenn a rez : *paratifoid* pe *leztifoid* ?

Setu an abegoù a zo d'ober gant *paratifoid* :

~ Pa amprester ur ger etrevroadel a zo deveradoù dezhañ e c'haller :

≈ pe amprestañ e zeveradoù war un dro gantañ ; kement-mañ a reer pa na gempleg ket an deverañ d'ur reizhiad, eleze pa vez skritelloù eus an deveradoù, an amrannoù o vezañ tunioù diforc'hiñ hep mui, sk. : *antigen*, *antikorf* (en daou dermen-mañ, ez eus bet abegoù moarvat evit dibab *anti*- nemet o reiñ d'ar rakger ur c'hemeradur dedroet, e-maez reizhiad) ;

≈ pe deverañ diwar an amprest hervez ur reizhiad vrezhonek kevatal d'ar reizhiad etrevroadel (o lakaat evel just emañ luniadur an deveradoù etrevroadel o kemplegañ d'ur reizhiad), sk. *eneballergek* (en termen-mañ e klot ent reizhiadek Br. *enep*- gant Et. *anti*-).

Evit a sell Et. *paratyphoid*, arver ar rakger *para*- zo un tun hepken evit lakaat kemm etre daou seurtad *salmonelloz* ; gallet e vije bet ober gant Et. *typhoid A*, *typhoid B* da skouer, evel ma reer gant Et. *hepatitis A*, *hepatitis B* pe e galleg gant *cirrhose de Laennec* ha *cirrhose de Hanot*. Aze emañ arveret ar rakger Et. *para*- e-maez reizhiad ha ne glot ket gant Br. *lez*-.

~ E degouezh Et. *typhoid*, *paratyphoid* emañ an daou dermen parzhek en ur reizhiad termenoù klinikel ha bakteriologek, ar garvevion o tec'han ar c'hleñvedoù-se o vezañ a-getep *Salmonella typhi* ha *Salmonella paratyphi* (ar re-mañ rannet e meur a spesad : *A*, *B*, *C*...). Er reizhiad-mañ en deus ar rakger *para*- e roll, evel merk rummañ avat ha n'eo ket dre ur ster piaouel.